

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :
R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.

Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h.

R/ : Ha get ho spered !

Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : **ho pet truez doc'homp ! (bis)**

Roit deomp ar peoc'h !

Kent ar gomunion :

Ar beleg : Setu Oan Doue, an hini a lam pec'hed ar bed :

Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

Komunion :

1 Meulit an Aotrou Doue, C'hwi holl, e draoù krouet,

Traoù hag a weler splann, traoù ha ne weler ket,

Meulit e holl gelloud hiriv, àrc'hoazh, bemdez,

Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !

4 Meulit an Aotrou Doue, Arc'haeled hag Aeled

O chom e lein an neañv, e palez an Dreinded !

Get ho telennoù aour, lârit kanenn an Ne,

Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !

5 Meulit an Aotrou Doue, àr ho tron lugernus,

E mor bras ar splannder, e-tal ho Mab Jezuz,

Gwerc'hez santel Mari, kanit ho karantez,

Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !

Veit kloziñ an oberenn :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigñ :

An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.

R/ : Amen !

Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver :

R/ : Bennozh da Zoue !

Kan-dibenn :

Un Ael a-berzh an Aotrou Doue,

Da Vari a lâras un deiz :

Mari, Doue en deus ho choazet

'Eit bout Mamm da Salver ar bed.

Kentezh, hervez komzoù an Ael,

Dre galloud ar Spered Santel,

Mab-Doue a zo bet koñsevet,

E-mesk an dud en deus bevet.

Ar Werc'hez a respont neuze :

Santez Mari, gwir Vamm da Zoue

Setu matezh an Aotrou Doue !

Goulennit 'eit ho pugale

Ra vo graet din, Ael benniget,

Meritiñ bout genoc'h eürus,

Hervez ar pezh hoc'h eus lâret.

E baradoz ho Mab Jezuz !



Parrez Ker Anna

2^e Sul an Azevent / 4 a viz Kerzu 2025

Kan digor : Mesi, dait hep dale 'veit salviñ tud kablus,

Diskennit ag an Neañv, Salver karantezus !

1 Sellit a lein an Neañv hon anken ha glac'har,

Klevit a lein an neañv hirvoudoù holl an douar !

2 'Vel deñved fariet, ne ouiemp 'menn ec'h aemp ;

Kollet hor boe an hent, pell doc'h Doue e vevemp.

3 Ne heuliemp, allaz, nameit hor fallantez ;

Kuzhet e oa doc'homp sklaerder ar wirionez.

4 Na pezh un teñvalded hor gronne a bep tu !

Goloet e oa ar bed avel get un noz du.

5 Àr-lerc'h un noz ken hir, pegourz e tay an deiz ?

Ha pegourz e savo sterenn ar roue nevez ?

6 Digorit, digorit, ô palez kaer hon Doue,

Ha laoskit da ziskenn hor Salver ag an neañv !

Salud d'ar bobl :

Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad

hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :

Respont : Ha get ho spered !

Confiteor : Me anzav dirak Doue hollgelloudek ha dirazoc'h, ma breuder,

am eus pec'het bras dre soñj, dre gomz, dre ober ha dre vank a ober :

dre man gwall, dre man gwall, dre man brasañ gwall.

Rak-se e c'houlennan get an Intron Vari bepred gwerc'hez, get an Aeled

ha get an holl Sent, ha geneoc'h-c'hwi, ma breuder, pediñ Doue aveidon.

Kyrie : Aotrou Doue (Krist), ho pet truez.

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr Izaia

Ur barr a gresko doc'h troad gwezenn Jese ha diàr e wrizienn en em zispako ur vrousenn. Arnezhe e repozo Spered an Aotrou; ar spered a furnezh hag a skiant, ar spered a guzul hag a nerzh-kalon, ar Spered a ouiziegezh hag a zoujañs Doue : lakaat a ray e blijadur e karantez an Aotrou, ne varno ket doc'h gwel an daoulagad, ne roay ket e sañtañs diàr gleved hepken. Barn a ray ar beurerion get lealded, hag e tougo sañtañsoù just e-keñver tud izel ar vro. Skoiñ a ray doc'h an dud drouk get gwialenn e gomz ha get anal e vuzelloù e lazho an den fall. Ar justis a vo gouriz e groazell. Hag ar fealded endro d'e ziglun. Neuze ar bleiz a vo é chom get an oan hag al loupard é c'hourvez get ar menn-gavr; al leue hag al leon a vo maget kevret hag ur bugelig o c'haso da vesaat. Ar vuoc'h a zebro asampl get an arzhaz, o re vihan a gousko an eil get egile, hag al leon a zaskenno plouz evel an ejon. Ar vagadell a c'hoario àr doull an aspig hag e toull an naer-wiber ec'h astenno ar bugelig e zorn. Droug ebet, dismantr ebet biken ne vo graet

ken àr ma holl manez santel, rak leun e vo an douar ag anaoudegezh an Aotrou, evel sol ar mor get an dourioù er golo. An deiz-se e savo brousenn gwrizienn Jese evel ur baniel evit ar pobloù, hag àr he zu en em droio ar broadoù; hag e vo leun a c'hloar al lec'h m'emañ é chom ennañ.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Psalm 71 :

En deizioù-se e vleunio ar justis ha fonnusted ar peoc'h da virviken.

*O Doue, roit d'ar Roue ho reizhder evit barn,
hag ho spered a justis da vab ar Roue;
dezhañ da ren ho pobl get eeunded,
hag ho paourerion hervez ar gwir.*

*Ar justis a vleunio en e zeizioù,
ha peoc'h leun keit ha ma pado al loar.
Ha ren a ray ag an eil mor d'egile,
ag ar stêr betek fin an douar.*

*Rak dieubiñ a ray an den é c'hervel,
ar paour-kaezh hep skoazell.
Truez en devo doc'h an den gwan ha reuzeudik,
saveteiñ a ray buhez ar baourerion.*

*Da viken e vo benniget e anv,
e vrud a bado keit hag an heol.
Ennañ e vo benniget holl veuriadoù an douar,
an holl vroadoù en disklerio eürus.*

Eil lennadenn : Lennadenn tennet a lizher an Abostol Paol d'ar Romaned.

Mam breuder, kement tra a zo er Skritur santel a zo bet skrivet evit hon deskiñ evit ma hor bo fiziañs start dre ar basianted ha dre ar c'honfort a gaver er Skritur-se. Plijet get Doue, an hini a roa pasianted ha konfort, derc'hel ho speredoù ha kalonoù unanet dalc'hmat hervez lezenn Jezuz-Krist, ma n'ho po holl 'met ur galon hag ur vouezh hepken da reiñ gloar da Zoue, Tad hor Salver Jezuz-Krist. Rak-se en em zegemerit hag en em harpit an eil egile, evel ma en deus graet Jezuz-Krist doc'hoch evit gloar an Aotrou Doue. Rak, el lâret a ran : Ar C'hrist en deus en em lakaet da servitour ar Yuzevion evit ma veze anavet splann fidelded an Aotrou Doue da zegas da wir ar promesaoù graet getañ d'hon tadoù. A-fet ar broadoù, lec'h o deus da veuliñ Doue abalamour d'e garantez, hervez mad eo skrivet : Setu perak me ho meulo, man Doue, e-mesk ar broadoù ha me a gano gloar d'hoc'h anv.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Allelouia : Ar beleg : *An Aotrou Doue geneoc'h :* **Ha get ho spered.**
Ar beleg : *Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mazhev.*
Ar bobl : **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

Abiel : *En deizioù-se en em ziskouezas Yann Vadezour ec'h embann ar c'homzoù-mañ e gouelezh Bro-Yuda : «Grit pinijenn ha cheñchit buhez, eme-eñ, rak tost eo rouantelezh an Neañv. Anezhañ eo en doa komzet ar profet Izaia pa lâre : «Bouezh an hini a zo é krial er gouelec'h : Kempennit an hent d'an Aotrou, eeunait dezhañ e vinotennoù.» Ha Yann a zouge ur vantell graet get reun kañval, hag ur gouriz ler en-dro d'e zivgroazell; e voued a oa kirvi-raden ha mel gouez. Donet a rae neuze davetañ tud Jeruzalem hag an*

holl dud a vro Youdea hag a vro ar Yordan, ha badezet e vezent getañ e dour ar stêr Yordan en ur anzav o fec'hedoù. É welet e tae kalz Farizianed ha Saduseaned da vout badezet e lâras dezhe : «Anienn naered ! Piv en deus roet deoc'h ar soñj da dec'h kuit dirak ar gounnar 'zo é tonet ? Grit enta pinijenn wirion, unan hag a zougo frouezh. N'it ket d'en em lâret ennoc'h hoc'h-unan : «Hon Tad eo Abraham !» Rak, me el lâr deoc'h, Doue a c'hell ag ar vein-mañ sevel bugale da Abraham. Emañ bremañ ar vouc'hal doc'h gwriziad ar gwez; ha kement gwezenn na daol ket frouezh mat a vo troc'het ha taolet en tan. Me avat, ho padeziñ a ran en dour evit ma teuahec'h da cheñch buhez, met an hini a zeua àr ma lerc'h a zo galloudusoc'h evidon ha n'on ket dign da denniñ dezhañ e sandalennoù; eñ ho padezo er Spered Santel hag en tan. Ar bal wentiñ a zo getañ en e zorn evit naetaat e leuriad, hag e winnizh a vo serret en e suler; ar pell avat a vo taolet en tan na varv ket.

En dibenn : ar beleg : *Setu Komz an Aotrou :* **Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !**

Kredo : **Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek,** Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, daet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv.

Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollbedel : **Klevit a lein an neañv pedennoù holl an douar !**

Lid ar profoù : *ar beleg : Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad hollgelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwï :*

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel : **Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr ar bed !**

Lan eo get ho kloar an Neañv hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**

Benniget an hani az a e anv Doue : **Hosanna e lein an ne !**

Gorreoù : **Ra vo meulet !**

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv.
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek,
Pardonit deomp hor pec'hedoù,
'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp,
Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion
Met hon diwallit doc'h an droug.